

## AN DURZUNEL

---

Kalz amzer a meuz kollet  
 O furchal ar c'hoajou,  
 'Klask tapoat eun durzunel  
 Kousket war ar brankou.  
 Dévet a meuz va amors  
 Ha tennet a meuz fall...  
 Achapet an durzunel  
 Ha nijet d'ar c'hoat all.

Deuz an noz ha gar mintin  
 Me'glew al lapoused  
 O kana, o fredoni  
 War veg ar gwe pignet.  
 Méz, n'euz hini anezé  
 Hag a douch va c'halon  
 Evel mouez an Durzunel  
 O ouela d'he mignon.

Hirvoudi a ra noz-de  
 Gant ar boan, ar glac'har,  
 Evel eun intanvez paour  
 Kollet gant he far.  
 He mouez a zeu betek d'in,  
 Hag hi'zo glac'harsus ;  
 Ha me da c'houlenn outi  
 He foanion truezus :

— « Petra, Turzunel yaouank  
 A dourmant da galon ? »  
 — « Kollet a meuz », emezi,  
 « Va fidela mignon.  
 Mar na zeu eur chaseour  
 Da ober d'in mervel,  
 Me'varvo gant ar glac'har  
 D'am miguon fidel. »

« N'euz na souten, na remed,  
 Na konsolasion,  
 Barek da zont da zistan  
 Ankenion va c'halon...  
 Trech'het on gant ar glac'har,  
 Mont a ran da vervel :  
 Méz na varvin ket kontant  
 Ma na varvan fidel. »

Gwelet a meuz o vervel  
 An durzunel yaouank,  
 Dizec'het eo va c'halon  
 Gant ar boan an tourmant,  
 En he huanad diweza  
 He deuz c'hoaz lavaret :  
 — « O va gwir vignon fidel... »  
 Raktal eo tremenet.

## — 42 —

Mellezour sklér ha brillant  
 Deuz ar fidelité  
 Te eo ar skwer ar gwira  
 Dimeuz ar garante.

Nann, na varvin ket kontant,  
 Mar na varvan fidel :  
 Birviken na zizonjin  
 Maro an Durzunel !...

**RIMADELLIG**

*Pater noster, dibidoup :*  
 'Man va c'haz o nea stoup,  
 Ha va c'hi war lein an ti  
 Oc'h oza boned d'an houidi ;  
 An diou vioc'h dorn ouz dorn  
 O kas toaz d'an ti forn,  
 Ha va mamm war greiz an hent  
 O krial forz war he dent ;  
 Va zad koz etal an tan  
 O e'houll' petra 'vo da goan :  
 — « Yod gwiniz du  
 Ha bac'hadou euz an daou du... »

Yod minus kerc'h,  
 Ha bac'hadou war he lerc'h...  
 Ar C'harveg hoz o vont d'e lein  
 Eur c'hoz trañaillou war e gein ;  
 Eur voutez koat en toull e rér  
 D'ober d'ezan hasta kaér.  
 Itron varia Koatnevele !  
 Krampoez, gwiniz ha chufere ;  
 Da viz maë Avalou glaz.  
 Au hini' oar a laro c'hoaz.  
*Tamtibidoujen, tamtibidei*  
*Ar C'harveg koz zo potr anei !*

